

Châteaufort



KANTIK

En Eor da Intron Varia-ar-Portzou

1 Salud deoc'h, Mari, rouanez
 Euz an env hag an douar!
 Salud deoc'h, mam a' drugarez!
 A greis kalon ni lavar :

DISKAN.

Itron Varia-ar-Portzou
 Clevit mouez ho pugale :
 Hed hor buez en hor poaniou,
 Hon diouallit nos ha de.

2 Choazet a beb eternite,
 Da veza mam da Jesus ;
 Lezet oc'h da vam deomp ive ;
 C'hui hon rento oll eüruz.

3 Lec'hiou santel a zo merket
 Da henori ar Verc'hez :
 Eno e skuil varnomp bepret
 Tenzoriou he madelez.

4 Chapel ar Porzou zo brudet,
Dre ar burzudou dispar,
A ra ar Verc'hez benniguet,
En andret an nep he c'har.

5 Evit dont d'ar C'hastelnevez,
Pelerinet, gant guir feiz,
Da henori guir van Doue,
A dreuz pevar c'horn Breiz.

6 A leiz an henchou ho gueler
O c'herruout a bell bras,
En eur bedi-daoust d'ho skuisder
Daoubleget var ho fenn bas.

7 Darn a deu d'he zrugarekat,
Euz ar grasou ho deuz bet,
Darn all a c'houlen eur mennad ;
An oll a ve selaouet

8 Evidomp-ni oll Bretonnet
A layar a vouez buel :
Kentevid mankout d'ho karet,
Ni ve guell ganomp mervel.

9 Dirag hoc'h imach benniguet,
Er Porzou ni a bedo ;
Pa vimp tentet pe glac'haret,
Gant fians ni a gano :

DISKAN.

Itron Varia-ar-Porzou
Clevet mouez ho pugale :
Hed hor buez en hor paoniou,
Hon diouallit nos ha de.